



KANTIK

DA ZANT VELAR

Var don : *Venez, divin Messie.*

DISKAN :

Kanomp eur c'hantik nevez
A greiz kalon d'hor zant patron :
Meulomp-hen gant levezet
Ha karantez gwirion !

Pe var don : *Bale Arzur.*

DISKAN NEUZE :

Kanomp, kanomp a greiz kalon
Eur c'hantik nevez d'hor patron :
Ra vo meulet gant pep Breton !

Gant sant Millo hag he bried
En doujans Doue-oe savet,
Ha gant furnez bepred renet ;

Med Melarik a vec'h ganet
Ha gant Doue kement karet,
Da heul he dad a zo barnet.

Gant Rivodus, breur hag eontr kri,
Gounezet gant ar warizi
Hag ar c'hoant braz da gomandi.

Goude m'hen deuz lazet an tad
'Oa gouskoude eur prins ker mad,
Rivod c'houlenn ive he c'hoad.

Dre ar poezon e fell dezhan
Dont a benn da genta outhan
Evel diouz eur vil amprevan ;

Med ar bugel zo diwallet
Dre nerz sin ar groaz venniget,
'Ra pep kristen arog he bred.

Goude eun torfed ken iskiz,
Rivod hep truez ouz he niz
'Gas var he lerc'h muntrerien griz.

Lezel beo 'reont ar bugel,
Ouz ar prins Millo ken henvel,
Med mac'haniet en daou ezel.

'Vit n'hellou ket var varc'h monet
D'an dachen gant he Vretoned,
'Na c'hoari gant kleze ebed.

Med dre vuzud Doue a ro
He zaou ezel dezhan en dro
Dre eur c'hannad euz an envo.

Siouaz 'vit ar paour kez bugel,
He wir a roue Breiz-Izel
Vo kiriek ma renko mervel.

Raktal m'hen deuz 'ta he vourreo
Euz an eil burzud eun ekleo,
E tot n'hen lezo pelloc'h beo.

Kioltan karget da zifenn
Ar paour kez bugel hep souten,
Da Rivodus a werz he benn.

(Eil Judas, ha ne ruziez ket ?
Daoust ha ne pefe aon ebed
Da veza gant Doue skoet ?)

Beteg kouent Landevennek,
Ha Keraez ha Kerlavrek,
E tec'h ar bugel kalonek ;

Med an avariseda a ren
Kioltan euz eur ger d'eben,
Beteg, seul maner Koat-Euen.

Ac'hano dre drubarderez
E c'hall tenna Melar er mez,
Ha da Lanneur 'z eont asamblez.

Eno neuze en kreiz an noz,
Pa oa Melarik o repoz,
Eo lazet buan ha didrouz.

Kioltan hag he vab Justin,
Gret, var ho meno, ho zol fin,
A dec'h a fo 'rog ar mintin.

Neuze Doue ive d'he dro
En he justis Justin a sko ;
Er porz raktal e kouez maro !

Kioltan 'barz m'hen deuz gwelet
Ar priz d'ar muntreer prometet,
Evel he vab a zo skoet ;

Hag e koll, siouaz ! en eun dro
Ar gweled hag he zouaro
'N eur vervel kreiz poaniou garo.

Rivod he-unan heb dale
'Renk renta kont euz he vue :
Mervel 'ra tri devez goude.

Aman, stouet en he iliz,
Meulomp Doue hag he justis,
Lanneuriz ha Leokmellariz !

Euz baranenv, c'houi, sant patron,
Diwallit bepred ac'hanon,
Ha goulenit din nerz-kalon ;

Ma valein var ho roudou,
Ma kerzin varzu an envon,
Daoust d'ar skuizder ha d'ar poaniou.

Rag Jezus hor Mestr he-unan
E neuz anavezet ar boan,
Bepred, beteg he dremenvan.

Ni ive, en amzer a ren
A renk stourm ouz enebourien,
Bepred niverusoc'h zoken ;

Med dre ar skouer euz ho pue,
Ni c'houzanvo evit Doue
Ha silvidigez hon ene ;

Hag ho pedennou, sant Melar
Hon diwallo var an douar
Hag hor c'hasso eun deiz d'ar c'hloar.

Evit diskan da ziveza, ma kaner
var don : *Venez, divin Messie.*

Hag eno gant an ele,
Ha da viken, o sant patron,
Kanimp bennoz da Zoue
En dudi hor c'halon,

Imprimatur :

Corisopiti, 31 Augusti 1907.

A. GADON,

V. g.